

SANTEZ BRIGIDA.

CANTIC SPIRITUEL

VAR BUEZ

SANTEZ BRIGIDA,

Pehini e deus un Ilis deyot e Paroz Lanvitan

Var ton : Guerz Santez Techla.

SPERET-SANTEL, illuminit va speret,
Roint din ar c'hraç da zisclêrya d'ar Vretonet
Ar Vuez gaer eüs a Zantez Brigida,
Guir batronez ar priedou er bed-mâ.

Ezec'hî, graguez, intanvezet, bugale,
Bet attantif ha selaouit e Bue,
Ma ellimp oll gant feiz donet d'e sedi,
Hac imita ar vertuziou anezi.

▲ Suede voa gunidic ar Santez,
▲ ligne vras, hervez rapport e buez :
He zad a voa e hano mat Brigerre,
Dijentil mat demeus a yrô ar Suede.

Pelerin voa, nonobstant d'e galite;
Bet voa ive e Sant Jacqès Galice;
Un den devot, a govesee bêp guener,
Gant desir bras da imita hor Zalver.

E Mam a voa eus a bêp vestuz carguet,
Un Itron vrás,, Sigridan e voa hanvet,
E devoa grêt ober calz a Ilisou,
Ha diazeet ouzo calz a leyeou.

Pa voa e Mam sur o tóuguen ar Zantez,
Var ar mor bras en em embargas eur vech,
Nombr bras e zud gant an tourmant zo beuzet,
Ha Sigridan dre viract so preservet.

Hac en nos-se e voe revelet dezi
E voa Doue a voa deut d'e freservi,
Abalamour d'ar c'hraouadur a zougue,
Eur presant caér d'ar bed-oll digant Doue.

Un den devot a remerqas ar Ver'hes,
Var ur c'houabr pa voe ganet ar Zantez,
Gant sclerdet yras, hac eur vouez a ziscérie
Dre ar bed-oll e voa ganet en nos-se.

Tri de hepken voe ar Zantes hep parlant,
Ar bêvare e parlantas distinctamant;
Se voa eur merq da c'houzout e voa choaset
E reng ar Zent gant hor Zalver biniguet.

Pa voa sez vloas e c'happarissas ar Ver'hes
Carguet a c'hoar e tal guele ar Zantes,

O tisqueus dey ar recompaç e dije,
Eur gurunen épad an eternite.

Pa voe en oad a ugent vloas, ar Zantes
E tisquezas e buez hac e santeles,
O veza chast, fur, ha devot, ha parfet,
O pratiqa ar vertuziou gant respect.

Ar Zantes-mâ a yas eur vech d'ar zermes,
Gant desir bras da glêvet ar Bassion,
Hac a velas hor Zalver qen afflijet
Evel pa vije er moineât crucifiet.

Hac hi goulen, va Jesus, oûli en em vouela;
Piou an hini en deus ho trêtet er guis-mâ?
Nep, am mepris o déveus ancounac'het
Eo evit o redima ez oun bet marvet.

Pelloc'h neuse, pa mede er Bassion,
Gant glac'har vrás e voa mantré e c'halon,
Na elle qet e c'Hontampli hep gouela;
Nobl ha partabl, imitomp-hi er poent-mâ.

Ar seiz, en aour e laboure ar Zantes,
Hac ar Verc'hes a ve gantî alies
E creiz an nos, hep gout da zen e save
Da adori à galon vat e Doué.

An diaoul cris unnes a deu d'e spontâ,
Cant troat, cant dorq disform voa stag ouest,
Pa er guelas, e tostas d'ar grucif,
Hac al doea vil o tec'hel pell diouti.

Pa voa erru en oat da vezá demezet,
 Evit plijout d'e zud e qemeras pried,
 Ma eureujas d'ur prinç voa hanvet Ulîe,
 Un den devot, guir zervicher da Zoue.

Fur e vevent, Brigida hac e fried;
 Mes hi bepret a rô pinijen caled,
 Yun ha pedi, hac en em vortifia,
 Beva ar beorien, o guisqa hac o loja.

Oll cuzulliou an Aviel a bieuille,
 Ar reglen vad d'e vugale a zisqe;
 Chagrinet ve pa deu nicun da vanqa
 En e zever, prest e leu d'e gorija.

Eur buguel desi eur vech a voa manget
 D'ober ar yun eus a sant Yan beniguet,
 Ha qementse a reas poan d'e speret;
 Mes sant Yan prest desi so apparisset.

Sant Yan o comz outi : me è, emeza,
 Ho sicouro bete an heur diveza,
 Evit at c'heus oc'h eus da fot ho puguel,
 Mo tifenco gant armou spirituel.

E ped danjer en em gav, c'hoas ar Ver'hez,
 Per gouleunie d'e freservi ar Zantez;
 Pa voa e poan eus e buguel diveza,
 Pres ida vervel, e teuas d'e delivra.

Birac an oll e teuas da douch outi :
 Courach, ya merc'h, e recompanç doc'h avi,

A so grāç deoc'h accordet gant Doue,
Da zelivra ar grague demeus ar boan-se.

An daou bried anflammet gant grāç Doue,
A yas o dabu da Sant Jacqès Galice,
O-tont d'ar guêr e coezas clān e fried,
Mes Sant Denez dezi so apparisset.

Hac a lavaras, rac ma er pede parset,
Voa digasset da reï yec'het d'e fried;
Ha prest goude e zint gant Doue inspiret
Da zepari Brigida hac e fried.

En eur gouënt e fried en em rentas,
Nebeut goude santelamant e varvas,
Hac e vadou ganti a voe partajet
D'e bugale ha d'ar beorien ezomec.

El Leandi en em rentas ar Zantes,
Da finissa e buez gant santeles;
Evit e peoc'h gallout ober e feden,
Hac ogmantij e foan hac e finijen.

Eut gourris reun var e c'horf paour a zague,
Var e diou-vrec'h bep guener e tivere
Ar c'hoar bervet, o sonjal en e c'halon
Unan benac eus a boaniou ar Bassion.

Quer carguet voa eus a speret un Doue,
D'ar pennou bras eus an Ilis e scrise,
O lavaret voant gant Doue gourdrouzet
Ober ar c'harg rac na viljent suprenet,

Pap, Rouanez, Princest hac Impakérien,
 Cabucinet, hac Esqeb ha Béleyer
 A gredé tout ar pez a lavare;
 Ar Speret-Glân dre e guenou a gounze.

Inspiret e voe da vont da visita
 Ar placou sacr qent mont divar ar bed-mâ;
 En Menez Calvar, en Rom, en Jerusalem,
 E voe ar Zantez, hac hi cos hac ancien.

Hac hor Zalver a ziscléryas e vuez
 Er veach-se antieramiant d'ar Zantez,
 Bete meimes an nombr demeus an toliou
 A recevas en e Bâssion garo.

Ar chênchamant hac ar buntionou
 Eus ar c'hériou hac eus ar rouantelezou
 A ziscléryas ar Speret-Glân d'ar Zantez,
 Hac ar moment diveza eus e huez.

Er bloa mil tri c'hant seifec ha tri-pgient,
 A viz gouelen an drivet deiz varhuguent,
 E finissas ar Zantez-mâ e foanniou,
 Da vont d'an ên da bossedi ar joayou.

Lies signou demeus e eurusdet
 Goude e maro gant an oll a voe guelet;
 Miraclou bras a rô Doue er c'hanton
 Dre e faveur hac e intercession.

D'an dud bouzar e tigasse ar c'hlêvet,
 Camz d'ar rô vuô, tra d'ar re dall ar guelet,

Dec-den maro a recevas ar vue
Dre e faveur digant an Autrou-Déue.

Ar Pab Bonifaç, daouzeçvet eus a hanø,
Informet mat demeus e oll miraclou,
E renq ar Zent en deus-hi canonisé
Eur bloa goude ma voe e c'horf entéret.

Sant Antonin ha calz eus a Zoctoret,
Baronius anezi o deveus bet comzet,
Abalamour d'ar revelationou
E devoa bet digant Jesus, hon Autrou.

Beza so calz demeus anezo scriiset,
Hac approuvet gant calz eus a Zoctoret;
Ar Chärdinal hanvet Torquemadou
A reas approuv e revelationou.

Ar c'houentchou a reas da yatisse
A so hanvet a urz santez Brigida;
Ebars e Rom eus un habit d'ar Zantez,
E deus vertuz da zelivra ar graguez.

E Suede e honorer ar Zantez,
En Spagn, en Franç, en Allamagn, en Flandres,
Hac en Treguer bremâ eo etablisset,
E Lanvilin, en faveur ar Vretonet.

Tud dal, tud mud, tud bouzar, tud afflijet,
Ezec'h, grague, qement en deus goal bried,
Deut d'ar plaç-mâ gant feiz ha devotion,
Hac ho pezo soulach doc'h affliction.

Ispicial ar grague a zo goal boauniet
 O laqat bars er bed o innoçantet,
 Et em göestlit tout da zantez Brigida,
 Dezi è roet ar pouvoar d'o-zelivra.

Prudent eo bet hoc'h avis, Lanvilinis,
 Etablissa ar Zantes-se en hoc'h Iliš;
 Graçou Doue hac e venediction
 Dre e faveur a ogmanto er c'hanter.

Nobl ha partabl, bezit devot d'ar Zantes,
 Suppliomph hi da veza hon Alvarez
 Ditac Jesus hac e Vani sacr ar Verches,
 Ma zaimp d'an ên da veuli Doue da James.

Oraison da Zantez Brigida.

TA B Eternel, c'houi pehini, dre meritou hor
 Zalver Jesus-Christ, en deus revelet da Zantez
 Brigida ar secrejou demeus an ênvou, grit dedmp
 ar e'hraq, dre intercession ar Zantes-mà, da bas-
 sedi assambles ganti ar memes gloar hac eurusdet
 evelti epad an esernite. Amen.



Montroglez, e ti LÉDAN, e traon ru ar Vur.